



Dematañ Kimiadiñ

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

adalek ar re grenn er skol vamm en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

- mestroniañ an egor, an amzer, ar c'horf
- ober anaoudegezh gant ar vugale
- implijout ha ijinañ un diviz

Pal ar c'hoari

bezañ ar primañ evit azezañ er plas dieubet gant an eil c'hoarier

Mont en-dro ar c'hoari

Ur c'helc'hiad a vugale azezet war al leur nemet unan a chom en e sav en diavaez eus ar c'helc'h.

Ar c'hoarier a zo en diavaez a dro tro-dro ar c'helc'hiad. Dibab a ra ur c'hoarier all en ur skeiñ war e skoaz hag en ur lavarout dezhañ « Demat Aotrou (pe Itron) » ar c'hoarier anvet a sav, a stard dorn egile en ur respont dezhañ « Demat ... »

D'an ampoent-se e tro pep c'hoarier deus e du tro-dro ar c'helc'h.

Pa dremenont an eil e-biou egile e rankont en em saludiñ en-dro. en ur stardañ an daouarn adarre e tivizont « Demat Mont a ra ... » Pa vez lavaret « Kenavo » gant unan diouto e vez respontet heñvel gant ar c'hoarier all en ur stardañ an daouarn atav ha pep c'hoarier a echu tre ar c'helc'h ha klask da vezañ an hini kentañ war ar plas a oa chomet dieub.

An hini erruet gant dale a ya da zibab unan all.

Frazennoù da implijout

- « Demat Aotrou, paotr, Itron, plac'h, »
- « Mont a ra mat ganit ? mat ar jeu ganit, mat an traoù »
- « Ya, mont a ra, ya, mat eo, ha ganit ? »
- « brav eo an amzer, fall »
- « Poent eo din mont kuit, an eur eo, ..., Kenavo »
- « Kenavo, kentañ gwel, ... »

Tu 'zo da ijinañ divizoù all diwar-benn ar predoù pe prennadennoù bet graet hag all ...